



## AR VRETONED D'AN TAN

—13—

Var    Var  
don kaér      Ch'hoan-ted neuz an All-man-ted full, Ch'hoan-ted neuz an All-man-ted don kaér  
An Alarc'h      fall, Dont c'hoaz da zis-tru-jí Bro C'hall. Dinn, dinu, daou! d'au-nem - gann! d'au-nem - gann! An Alarc'h  
(Barzaz-Breiz)      fall, Dont c'hoaz da zis-tru-jí Bro C'hall. Dinn, dinu, daou! d'au-nem - gann! d'au-nem - gann! (Barzaz-Breiz)

\*    \*

ob!      Dinn, dinu, daou! d'au-nem - gann!      Eb' au!

I  
C'hoantet neuz an Allmanted fall (*diou wech*)  
Dont c'hoaz da zistrui Bro C'hall.

## DISKAN

Din din daon, d'an emgann, d'an emgann,  
Ho!

Din din daon, d'an emgann  
Ec'h an!

## II

Kredi' re Gwillou, al loen brein (*diou wech*)  
En Pariz 'oa fletel e lein.

## III

Mez meur a viz a zo dija  
Eman al lein-ze o iena.

## IV

Neveni vad d'ar C'hallaoued  
Ha malloz ru d'an Allmanted !

## V

Malloz d'an drasterien groage,  
Merc'hed yaouank ha bugale !

## VI

An dud koz ganté 've lac'het  
Hag an ilizou distrujet.

## VII

Hag ar paour kez Beljik vihan  
'Zo laket en gwad hag en tan.

## VIII

Mez ar Franz hag he mignonned  
'Vit ar Frankiz a zo savel

## IX

Ha deuz an tu all d'ar mor don  
Eo deut armeou ar Zozon

## X

Ar Veljik, Bro-Zoz hag ar Franz,  
Me 'gred er wec'h-man devo'lanz !

## XI

Deuz an Alzas betek Dixmud  
'Deuz lae'hel d'ê millierou l'ud.

## XII

Ha prestik rivier braz ar Rhin  
Gant o gwad a vo liou d'ar gwin !

## XIII

Hag ar Russi, deuz an tu am  
A wask warné gwella ma c'hall.

## XIV

En Breiz-Izel ar botred vad  
A zo et holl da vrezellat

XV  
Skrignel 'neuz bleizi Breiz-Izel  
O klevet embann ar brezel

XVI  
Elec'h ma 'n emgann Bretoned  
A red puill gwad an Allmanted

XVII  
Ha pa gavont potred Gwillou  
Ar re-man 'goue a drennilladou.

XVIII  
Gras d'ar Franz eman Breiz-Izel  
O reï d'ei ar gwella skoazel.

XIX  
Choui, tadou ha mammou kristen  
Kasit da Zone eur beden.

XX  
Da c'houenn gras d'ho pugale  
Dont c'hoaz d'ho kwezel en bue

XXI  
Hag ive 'vit an dud varo  
'Deus skuillet o gwad 'vit o bro

XXII  
Ma 'vo skany d'ê an douar ien  
Ha ma voint eurus da viken.

XXIII  
Ma voint eurus 'kichen Doue  
P'o deuz gonezet al lore !

XXIV  
Kasit da Zone eur beden  
Evit ma echuo souden

XXV  
Ar brezel hag e holl garnach  
Gwasoc'h 'vit er broiou soyach.

XXVI  
Potred ar Prus 'lech ma kouefont  
Beteck de ar Varn a chomfont

XXVII  
An flour a gonezo eus ar gwe  
'Rai dour binniget war o be !

DISKAN  
Din din daon, d'an emgann, d'an emgann,  
Ho!

Din din daon, d'an emgann  
Ec'h an !

Pierre JAOUAN. — *Tous droits réservés*